

Metropolenn = meurgêr : ur gêr vras o c’hreizenniñ an dud, an obererezhioù, ar pinvidigezhioù hag ivez he deus kefridioù (rol) politikel, sevenadurel ekonomikel , finañs bras, e par ar bed zoken..

Kefridioù kêr= fonksionoù :seurtoù obererezhioù pennañ en ur gêr pe en ur c’harter diouti (kefridi kenwerzh, > politikel- ekonomikel- arc’hantourel- sevenadurel- lojistik ha dezougenoù- diplomatek- sevenadurel ha skiantel, industriel

Kêr ved = Megapolenn: kêr vras é vodiñ tud, obererezhioù ha pinvidigezhioù. Geti e vez gourc’hemenn politikel, ekonomikel pe sevenadurel e meur a skeul, e par ar bed zoken. Hag ivez mell kêr vras oc’hpenn 10 milion a annezidi enni.

Megalopolenn : tachad kêr ma vez kevreet mat meur a gêr kenetreze evel ar Megalopolis amerikan (eus Boston da Washington), megalopolenn europat (eus Londrez da Vilano) hag hini japonad (eus Tokyo betek Fukuoka).

Kêriekaat: doare ma vez kreizennet ur boblaéns er c’hêrioù.

Lochennaoueg :karter paour savet diwar danvezioù adimplijet ha kavet evel bachou plastik, toloù, koad...

Kempenn : Raktres kaset àr-raok evit lakaat da dalvezout un tiriad (lec’h)

Feur kêriekaat : kresk an niver a dud é vevñ e kêr.

Broioù diorret :Broioù pinvidik evit al lodenn vras ha diazezoù beviñ pennañ mat.

Broioù àr eskoriñ : Broioù a denn gounit eus ar c’hresk demografel uhel hag eh a àr-raok an doareoù beviñ evit an dud.

Kêr-greiz : kalon ar gêr. En em ledet eo ar gêr tro-dro d’ar c’harter istorel-se.

Bannlevioù: tachad kêr en em led tro-dro da greiz-kêr.

Kêr padus : kêr a respont da ezhommoù an dud hiziv hep mirout ouzh ar rummadoù o tont da bourveziñ d’o ezhommoù dezhe.

Kurunenn drogêrel: takad kêr tro-dro d’ar poloù kêr

Bedeladur: evit an tiriadoù hag ar c’hevredigezhioù, doare da enframmiñ ha da vout edan dalc’h e skeul ar bed

Gourc’hemenn: obererezhioù ekonomikel, politikel ha sevenadurel a ro tu d’ur gêr da gaout ul levezon àr he ziriad.

Hinterland: kein-vro ur gêr

Gwallzisparti sokial-ha-lec’hel : dispartiiñ ar poblañsoù e karterioù disheñvel hervez o doare beviñ, o renkas sokial/sevenadurel hag o orin etnikel.

Hub: gêr e saozneg : kroazhent-daremprediñ: lec’h ma vez kroazet meur a rouedad dezougen disheñvel (nijerezed, gourhentoù, trenioù)

Divaeziadeg= didudiñ diwar ar maez : ar Fed e ya kuit an dud eus ar maezioù evit beviñ e kêr.

Lederezh kêr: En em ledanaat a ra an takadoù kêr àr ar maezioù

FTN : firmoù treuz-broadel : embregerezh get un obererezh àr ar bed a-bezh . Peurliesañ emañ e sez sokial en e vro orin.

Bodad-tud pe lec’h poblet-tre: Rannvro poblet-tre

Rouedad: sammad binvioù dezougen pe liammoù etreze lec’hioù pe tud

Megalopolenn: spas ennañ meurgêrioù ha kêrioù liammet start kenetreze a ya a Londrez betek Milano é tremen dre draoñienn ar Rhein (evit Europa).

Embregerezh treuzvroadel (FTN= firme transnationale): embregerezh staliet e pep lec’h er bed (d’an nebeutañ 5 stad).

Meurgêriekaat= metropoladur: tolpadur an dud hag an obererezhioù a renk uhel e-barzh ha tro-dro d’ar c’hêrioù brasañ pe d’ar metropolennoù.

PMA: Broioù dilañs= broioù paourañ ar bed: an 48 bro paourañ ar bed (en o zouez 34 bro e Afrika) get diaesterioù bras evit diorren.

Redoù: hollad marc’hadourezhioù, tud, keleier hag arc’hant bras oc’h ober monedone dre ar bed.

Kêr kevreet: kêr enframmet mat e rouedadoù ar bedelaat. Seuil vui eo kevreet ur gêr, seul vrasoc’h he fouez hag he levezon e par ar bed.

Kêr lodennet =kêr karterioù disheñvel enni: kêr ma vev an dud enni e karterioù disparti, hervez o finvidigezh pe o orin etnikel.

Kefridioù kêr: seurtoù obererezhioù pennañ en ur gêr pe en ur c’harter diouti (kefridi gwenwerzh, kefridi industriezh....)

Aveadurioù: ar savadurioù hag an ekipamantoù staliet en ur gêr evit aesaat buhez an dud: ospitalioù, hentoù, straedoù, porzhioù-mor, tiez-gar, tiez-dudi, tachennoù sport...

Fraostoù industriel: takadoù industriel dilezet(da skouer uzinoù) hag àr ziskar en abeg d’an enkadenn ekonomikel pe gemm produadur.

Karter an aferioù (CBD): kalon ar gêr. En em ledet eo ar gêr tro-dro d’ar c’harter istoerel-se get ur gourc’hemenn ekonomikel, sevenadurel, diplomateik...E-barzh e vez skraberioù –oabl o strolliñ burevioù an FTNoù

Disparti sokial pe gwallzisparti sokial : dispartiiñ ar poblañsoù e karterioù diheñvel hervez o doare beviñ hag o orin.

Meskaj sokial : tud pinvidik pe paour zo é chom er memes karter